


Eil Bloavez

15 - 16



GOURE - EOST 1949 - 35 Lur

LANGLEIZ

GRANDS MAGASINS TREANTON

FONDÉS EN 1848

Place de l'Église et Place de Lourdes

LANDIVISIAU

Téléphone 7

Grande-Place

SAINT-POL-DE-LÉON

Téléphone 130



Quincaillerie, Ménage

Electricité, Fournitures Industrielles

Matériaux de Construction

Charbons, Bois du Nord, Fers, Métaux, etc...

On trouve de tout chez **TREANTON**

AU MEUBLIER D'ART

Ep - Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83

Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains



FILET BLEU

BISCUITS FAMEUX

QUIMPER



CAMIONNAGE

DÉMÉNAGEMENTS

GARDE-MEUBLES

L. Tanguy

Quimper

DÉCORATION, LITERIE, TISSUS D'AMEUBLEMENT

A. POUCH et Fils

TAPISSEIERS
DÉCORATEURS

17, Rue Sainte-Thérèse, QUIMPER — Téléphone 11-60

Ti ar GLOAN

9, Straed ar C'higereziou, KEMPER

Gloanañ digemmesk

eus an oll ardameziou

E ti

SOUFREREZ KERNE

E. BEGOT

13, Straed Jean-Jaurès, KEMPER
Téléph. 9-33

E vez dreset adteuzet evit ar gwellu goloñu-kaoutchoug ar rodou

Gwerz a c'holoñu a bep ment — Labour val, graet hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"

MODÈLES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc...

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ
ORFÈVREURIE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère)

Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplôme
de l'École
Nationale
d'Optique

DELBENN

Diplôme
de l'École
Française
d'Orthopédie

16, Rue Kéréon. — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN

7, Rue Kergariou
QUIMPER

VITRAUX

PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES
SACS ET NAPPES EN PAPIER, FICELLES

Jean PAYAN

Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88

133636

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Hor goueliou (An Tad)	Pajenn	2
Petra 'vo graet evit en divroerien (A. Gervorvan)	—	4
Piou eo Staline? (V. S.)	—	5
Kan an ed. (Turzunell Breiz - Y. Kerrien)	—	6
Ar viou torret (L. Kervilin)	—	7
Bleun Brug Locronan 6-7 Eost	—	8
Tenzor an dinlin goz (Ab Sulio)	—	10
Pirc'hirinadenn Jozon (Evnig Penn-ar C'hoad)	—	11
Gwechail e Kervenn (H. Greff)	—	13
C'hoariou	—	14
Keleier	—	15



PRIZIOU :

Koumanant ordinal (eur bloaz)	350 lur
Koumanant a zikour	500 lur
Koumanant a enor	800 lur

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère).

Skrivit sklaer hoc'h anoioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

LAKIT EVEZ BRAS


1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : **Mr l'abbé Jean-François Falc'hun**, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da : **Mr l'abbé Laurent Bleunven**, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). **C. C. P. 1266.53 Rennes**, ha nann mui 21.802 evel araok.

REVUE MENSUELLE

Ar meroù : **M. l'Abbé BLEUNVEN**
Recteur, **PLOMELIN**, par Quimper

Ti-Moulervez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, **RENNES**



HOR GOUELIOU

1 gouere, gwener kenta ar miz, ha gouel Gwad prizius Hor Zalver. — « Unan eus ar zoudarded a doullas dezañ e gostez gant eun taol goaf, ha kerkent, eus e galon e redas dour ha gwad. » Nann! N'eo ket gan taour na gant arc'hant eo en deus Hor Zalver hon dasprenet, met gant e wad skuihet betek ar berad diweza. Soñjomp ervat e kement-se, ha rentomp dezañ karantez evit karantez, o senti bepred ouz e c'houre'hemennou.

2 gouere, sadorn : gouel Maria-Lid. — « Magnificat... Va ene, eme ar Werc'hez, a gan meuleudi da Zoue... » A unan gant Mari, meulomp ivez an Aotrou Doue : nag a vadou hon eus digantañ bemdez!

17 gouere, c'houc'hvet sul goude ar Pantekost. — « Me an eus truez ouz ar bobl » em Jezuz... D'ar bobl-se, Jezuz en deus graet an

holl vad en deus gellet, betek mervel eviti! Ha ni, e ziskibien, petra a reomp-ni?

26 gouere, meurz : santez Anna, patronez Breiz. — Evel Nikolazig, karomp a-greiz hor c'halon ar « Vestrez vat » a zo bet karget gant Doue da zionall hor bro; pedomp anezi gant fiziañs : biken n'hon dilezo!

5 eost : gwener kenta ar miz. — Kalon Zakr Jezuz he deus goulenet digant santez Marc'harid-Mari ma vije kinniget da Zoue kals pinijennou hag oberou mat evit rapari ar pec'hejou graet enep e volontez santel. Epad ar miz-mañ e vo graet, siouaz, pec'hejou niverus, dreist-holl war bord ar mor. Kinnigomp da Zoue, d'an nebeuta, eur gomunion leun a garantez.

7 eost : navet sul goude ar Pantekost. — « Jeruzalem, Jeruzalem, ma anavezfes, te ivez, ar peñ a c'hel-

lfe rei dit ar peoc'h... » Ar c'homzouze, a lavaras gwechall da gêr Jeruzalem, Jezuz o lavar ive da gement ene ha da gement bro a zo. Gantañ, ha gantañ hepken, emañ ar wir beoc'h. Sentomp bepred ouz e lezennou santel!

14 eost : deket sul goude ar Pantekost. — « Va Doue, eme ar publikan, ho pet truez ouzin, rak me a zo eur pec'her » (Parabole ar Farizian hag ar Publikan). Diouallomp mat diouz pec'hed an ourgonilh a zisplij kement da Zoue. Añzavomp hor pec'hejou gant izelegez, keuz ha lealded, hag e vimp pardonet.


15 eost : gouel ar Werc'hez douget gant an Aelez d'an Neñv. — « Bezomp holl laouen en Aotrou Doue o lida ar gouel-mañ... » Ya, bezomp laouen o soñjal emañ bremañ hor

Mam vat er baradoz, korf hag ene, hag e tremen eno he amzer o soñjal ennomp hag o pedi evidomp.

16 eost, meurz : sant Arzel, patron Plouarzel ha Ploërmel : eur zant hag a gare kenañ ar bedenn, ar zioulder, an eneou. Kemeromp skouer diwarnañ, ha dalc'homp mat d'ar Feiz sakr en deus hadet en hor bro.

21 eost : unnekvet sul goude ar Pantekost. — Ar Zamaritan a gemeras soursi ouz an den gloazet. (Parabolen ar Zamaritan mat.) Ha ni, nag a wech hon eus ivez tro d'ober vat d'an dud en o c'horf hag en o ene! Ha bez'ez omp karantezus ha madelezu evel ar Zamaritan maf?

AN TAD.



Santez Anna

L'EXPOSITION D'ART SACRÉ DU BLEUN-BRUG

Le Bleun-Brug organise à Locronan une Exposition d'Art Sacré, du 1^{er} au 15 août prochain.

Tous les genres seront représentés : architecture, peinture, sculpture, gravure, vitrail, ferronnerie, orfèvrerie, mobilier, céramique, reliure, ornements, imagerie, éditions, etc.

Les œuvres devront être remises ou envoyées pour le 15 juillet.

Pour tout renseignement et pour envoi de bulletin d'adhésion, s'adresser à M. J. BRETON, Secrétaire de l'Exposition Bretonne d'Art Sacré, Sant Mickaël, rue de Pont-l'Abbé, Quimper.

PETRA' VO GRAET EVIT AN DIVROERIE

A. GERVORVAN

Kals tud yaouank a zo rei dezo kuitaat Breiz da c'hounit o buhez e lec'h all. Eur C'hendalc'h en deus studiet, e Kemper, en hañv tremenet, petra a oa da ober evit o heñcha. Arzel a zispleg da Ber, e amezeg, petra zo soñj da ober.

ARZEL. — N'am eus lavaret ger ebet dit c'hoaz, Per, eus ar brezegenn a reas e Kemper an aotrou F. Prigent, eus « Office Central » Landerne. He-mañ a zisplegas da genta, penaos ec'h en em gemer Sekretouriez an Divroerien evit an Departamant (postel e Landerne), evit heñcha an divroerien nevez; peseurt tud a vez gwelet o ti-vroa; petra a raer dre ar Frañs abez evito. Traou talvoudus kenañ eo ar re-ze da c'houzout... Met en eur echui, en deus komzet en eun doare dispar diwar benn an ezomm a zo da brepari an dud a dle divroa. Setu amañ petra a lavare :

1° Ret eo lakaat ar familhou da welet, pell araok ar poent diweza, penaos kaout plas ha labour d'ar re eus o bugale a zo galvet da zivroa.

2° Ret eo sikour ar familhou da anaout pere eus o bugale n'int ket graet evit al labour douar, nag evit chom er vro : d'ar re-ze eo ret klask eun hent all. War ar poent-mañ, ar skol hag ar familh a dle en em zikour.

3° Ret eo ivez sikour ar familhou da lakaat etre daouarn o bugale eur vicher vat, evit ma vo aes dezo kaout eul labour eret ha pac vat e kêr; pa vo deuet ar poent dezo da guitaat o familh.

PER. — Ya! Ya! Brao e lavar... Met daoust ha kredi a rez e vo gelllet di-huna ar familhou en doare-ze?

ARZEL. — Ha perak ne ve ket? Ne vo ket graet en eur huñvreal eveljust, nag o pismiga ar re a glask ober eun dra bennak! An taol-lañs kenta, a gredan, a rank dont a berz ar skol, alies ivez a berz ar beleg. Rak ar familhou, re alies, a zo troet da c'hortoz ar poent diweza abarz soñjal klask plas d'o bugale. Ar re yaouank a vez peurliesha dibrederoc'h c'hoaz, hag eus o oad eol Ret eo eta deski d'ar gerent soñjal abred en amzer da zont o bu-

gale, sellet pell en o raok, da lavaret eo karet o bugale muioc'h eget o afe-riou pemdeziek.

PER. — Ya! Gwir awalc'h a lavarez. Bremañ ez eus kals tud hag a zesk beva dizouris. Ahaoue m'eo deuet al lezennou evit « sikourioù ar familh » (1), hag a zo traoù da zerc'hel koulskoude, ez eus siouaz kals kerent hag a zo en em lakaet da vev diwar goust o bugale. « Eur c'hounidegez » int evito, a lavaront. Ar c'haoziou-ze a zisplij din-mel! Ma ne ziousallomp ket, e vo gwelet hep dale an dud o sevel bugale evel ma savont chatal, respet dit, netra nemet abalamour ma « raportont ». Soursi ebet ne vo keme-ret ganto ahendall. Ha pa vo deuet ar vugale en oad da c'hounit o buhez, d'en em ober eur stad a vuhez dereat, ne vint mui gouest nemet da redek bro ha d'ober laeron pe dorfetourien: gounid sklaer evit ar vro, ha kollou anat evit an holl... Ar wirionez a zo ganez: ret eo deski d'an dud penaos klask ervat mad o bugale evit o amzer da zont!

ARZEL. — Kompren a rez e vo kement-se eul labour tenn. Ret e vo sklerijenna, displega, skei war an tach... Ne vo nemet tud a galon-hag a c'hello beza a penn al labour-ze. Hag ouspenn-ze, ret e vo dezo ive beza dire-bech o unan, pe ne vo ket digemeret o menozioù. Tud gouizie, tud a vrud vat, ha tud hag a zo enno eur garan-tez virvidik evit an holl Vretoned: setu ar re a gemero ar garg da zevel a nevez ar bec'h a zo bet douget, gant kement a nerz hag a vadelez, gant ar Vretoned kalonek o deus sikouret, bremañ ez eus 25 vloaz, an divroidi kenta da gemer o staliou nevez e kreisteiz ar Frañs. Ha prest out, Per, da rei dorn dezo hervez da c'halloud?

ARZEL GERVORVAN.

(1) Allocations familiales, e galleg.

PIOU EO

STALINE ?...



SETU amañ, hervez « Kravchenko », oberour brudet al levr : « J'ai choisi la liberté », piou eo Staline.

N'eo ket eun den brao.

Bihan eo, krapok kofek. E zremm a zo liou teñval dezi, moustachek ha leun a bikou panez. E vrec'h kleiz a zo difurmet. E zent, hanter vreñ, a zo meur a hini anezo a-dreuz.

Al liverien o deus graet anezañ eur pollred bravoc'h kals eget ne deo e gwirionez: an dra-mañ, gwir eo, a c'hoarvez gant kals pennou-bras!

Gouzout a ra e unan n'eo ket eur paotr koant; ha darn a lavar eo en abeg da ze ne blij ket dezañ en em ziskouez.

Karout a ra beva kuzet, e unan gant e zoñjou.

N'eo kef eur gwir Rusad: ginidik eo eus bro ar C'hokaz. Dre-ze, kals eus ar pennou bras a gaver en dro dezañ a zo eus ar vro-ze.

Labourat a ra dreist-holl epad an noz: betek diou ha teir eur diouz ar mintin. Met ral eo dezañ kregi gant e zevez araok kreisteiz.

Plijout a ra dezañ ar c'hreun-lavarioù (proverbes) rusek. Goude beza sinet an emgleo gant Hitler, e penn kenta ar brezel, e lavaras d'e vignoned: « Ne warantan ket blaz ar zou-benn; ar pezh a zo sur avat, eo e vo tomm ». D'eur glabouser ha ne vez fin ebet d'e gaozioù e lavar: « Blejal a rez evel eur veoc'h oc'h hala; e pelec'h avat emañ al leue? » Pe c'hoaz: « Tro da grampezeñ pe e vo suliet. »

Karet a ra ar sonerezh (muzik), daoust ma n'eo ket, war a lavarer, gwall zesket war ar skiant-se.

— Kredi a ra er sperejou. Konta'reer ne ra netra vras ebet hep chom pell hag hir da zoñjal dirak korf maro Le-nine, an hini a zo bet tad an dispac'h bras er Rusi.

Eun den gwidreüs ha fin evel eul louarn eo ouspenn: « Ar finesa, emezañ, a zo unan eus lies-doareoù an nerz. »

P'en devez droug ouz unan bennak eo evit mat. Biken ne bardono da zen ebet.

Pa zeblant plega deoc'h awechou, eo evit gellout koueza warnoc'h gwelloc'h a-ze.

Plijout a ra gantañ kaout en dro dezañ tud eveltañ: tud kreñv, diskor-pul ha didruez.

Eun den disfizius kenañ eo. Kemer a ra evit enebourien dezañ betek e wella mignoned, ha lazet en deus nouspet hini anezo.

Krena'ra an holl dirazañ. Den ebet, journal ebet, ne gredfe embann an distera tra en e eneb. Dirazañ, pep hini a dle plega.

Dalc'h en deus erfin d'e venozioù: renet gantañ, holl gomunisted ar bed, kouls eus ar C'huz-heol hag eus ar Zav-heol, a stourm da astenn rouantelezh ar « baradoz ruz » war an holl vroioù. Gwaz d'e revelien a daol o zreid er maez eus ar roudenn merket gantañ dezo! Gwasoc'h c'hoaz d'e enebourien: ma c'hell, eun devez, teurel e graban warno, e kousto ker d'o ler!

V. S.

AL LIAMM

kelaouenn lennegel

Un niverenn 80 pagenn bep daou viz

Koumanant evit 6 niverenn : 600 lur

Sekretour : P. LE BIHAN, 1, Avenue Marceau

TRAPPES (Seine-et-Oise) — C. C. P. 5349-06 Paris

KAN AN ED (1)

Andante

P Bep bloaz eur c'han a red E mae-ziou Breiz I - zel Kle-
 vet e vez an ed, he-jet gant an a-vet, o ka-na gous-ta
 dik, sou-blet gan-tañ e benn, eur c'handous ha flou-rik, hen-vel
 ouz eur be-denn. Ar greun a zo da-re, hag ar pen-nou poun-ner a
 zoubl di-rak Dou-e, Di-rak Dou-e O-chouer; ka-na re-ont laou-en Meu-leu
 di d'an dou-ar, Ben-noz d'ar skler-i-jenn ha d'an he-ol klou-ar

I. Bep bloaz eur c'han a red
 E maeziou Breiz-Izel :
 Klevet e vez an ed,
 Hejet gant an avel,
 O kana goustadik,
 Soublet gantañ e benn
 Eur c'han dous ha flourik,
 Heñvel ouz eur bedenn.

II. Ar greun a zo dare,
 Hag ar pennou pounner
 A zoubl dirak Dou-e,
 Dirak Doue o C'hrouer;
 Kana'reont laouen
 Meuleudi d'an douar,
 Bennoz d'ar sklerijenn
 Ha d'an heol klouar.

III. An eoster, dizale,
 A deuio d'o diskar;
 Hag o fennou dare
 O koueza d'an douar,
 A gano c'hoaz laouen
 An eurvad da veza
 Dornet mat ha kempenn
 D'ober danvez bara.

IV. E parkeier ar bed
 An Hader Sakr, eun deiz,
 En deus laket an ed,
 Ha greun a zo eleiz.
 An eost a zo puilh,
 Eosterien eo a vank!
 Doue! Vit o c'hutuilh
 Grit ma tiwantint stank!

(1) An toniou disheñvel roet d'ar c'henta ha d'an eil koublad a c'hell beza kanet asemblez evit an trede hag ar pevare, d'ober eur c'han e diou vouez kendere.

AR VIOU TORRET

Araok kaozeal, merc'hedigou,
 Grit diou pe deir zro 'n ho kenou :
 Lasit da vat ho loer er gêr,
 Ha dalc'hit start krog er baner.

Gant istor an tri-ugent vi
 Me 'ya da rei deoc'h testi
 Penaos ne c'hell ket ar merc'hed
 Chom hep respont ouz ar wazed.

Da geñver foar bras Lokornan,
 Eur plac'h yaouank eus Pennvenan
 A gerze skañv dre an heñzhou,
 Ouz he brec'h pemp dousenn viou.

Evel Perrin 'barz ar fablenn,
 Kals huñvreou 'dreuze he fenn :
 « Ma werzan mat va fanerad
 E c'hellin kaoul eur c'hroc'hen gad ».

Zoken, ma vez ker ar viou,
 E c'hellin kaout eur c'hroc'hen gad ».
 D'am breur bihan en deus tri bloaz,
 Hag a zo en e lostenn c'hoaz.

« Ha piau oar ? Marteze zoken,
 graet ganen va holl frenadenn,
 E chomo hanter-kant lurig...
 Da brena butun d'am dousig. »

Gant ar zoñj-se, 'vel Perrinig,
 Va flac'h a ya d'ar pildrotik;
 Ha n'eo ket sonez, gant ar stroñs,
 Las he loer a dorras groñs!

...Warlerc'h e teue eur paotr fin,
 Eur c'horf matis, eur min foun,
 Eun tortig koz, ne glaske ken
 Nemet tenna eun dreflezen.

Pa wel Chaned o lasa loer,
 Gant he genou krog er baner,
 E rankas lezel eus e greiz
 Eur mouse'hoarz leun a valiz.

« Bremaik me 'welo, emezan,
 Ha gwir eo ar pezh a glevan :
 Ne c'hell tamm ebet ar merc'hed
 Chom hep respont ouz ar wazed ».

— « Petra 'zo erruet, merc'h kèz,
 Torret eo ar zug-gar ganen ?
 Serr mat da veg war an dourgenn,
 Pe sur e vezo frigasenn! »

— « Ober a ran, eme Chaned... »
 Ha kerent emañ diskroget.
 Ha patatra ha patatri,
 An holl viou e kreiz ar pri!

— « Lavaret am boa dit, sodenn,
 starda da zent war an dourgenn.
 Ma kârjes beza selaouet,
 Da viou ne vijent ket bet torret! »

— « Ha piau 'zo kaoz nemedout-te,
 Koz tort fall ma 'z out! Kerz alese,
 Pe touchantik va bouton prenn
 A blado dit da damm torgenn. »

« Ma n'eo ket mez d'eur penn gwenn
 Ober eun taol kenn diskempenn...
 Ne fell ket din, pezh divalo,
 Gwelet ac'hanout war va zro! »

Met kaer he devoa pennfolli,
 Ar c'hoarz a voe enep dezi,
 Hag an holl e foar Lokornan
 'Glevas istor plac'h Pennvenan.

Peseurt kentel, mignoned ker,
 Eus an istor-mañ a denner ?
 Lavaret a ra d'ar merc'hed
 Diwall mat ouz ar babored.

L. KERVILIN.



Lennit en niverenn da zont :
"AN DIAOUL HAG AR BANERAD SIVI"
 istor farsus savet gant PETROMIG

BLEUN-BRUG LOKRONAN

Renket eo dre vras abadennoù Bleun-Brug Lokronan. Setu amañ petra a vo da welet, da glevet, da veva en daou zevêz gouel a zacho d'ar gêrig vrudet eur mor a dud eus Breiz hag eus an diavaez.

SADORN, 6 A viz Eost

Adalek 10 eur betek kreisteiz,
ha 14 eur betek 18 eur :

Studiadennoù ha displegadennou
war Lennegez Vreiz

Da 21 eur,
dindan porched iliz Lokronan :

"KANOU EN NOZ"

Kanerien a vo klevet, dre hini, dre bevar,
hag a strolladou, an delenn d'o eul.

Da 23 eur :

PROSESION AR GOULOU
henchet gant Sonerien biniou ha taboulinerien.

Da 23 eur 45 :

OFERENN HANTER-NOZ
war Menez Sant Ronan

SUL, 7 A viz Eost

Eus 8 eur da 11 eur : **Kenstrivadegoù**
an displegerez, al lenn, ar c'han.

Da 11 eur 30 :

OFERENN-BRED ar BLEUN-BRUG
e iliz Lokronan. - Ar brezegenn a vo graet gant E Vrasder
an Aotrou Fauvel, Eskob Kemper ha Leon.

Da 14 eur : **MICHERIOU BREIZ**
a dremeno dre Lokronan : 400 tremeniad a vo, gwisket
gant dilhajoù Breiz, hag ambrouget gant Marc'hegerien
eus Kerne ha Leon.

Da 15 eur 30 : **KOROLL HA KAN**
Dansou ha Kanaouennoù gant ar C'hele'h Keltiek
eus Kerne, en eul lec'h dudiñ,
etre Menez Lokronan ha Bae Douarnenez.

Da 20 eur : war blasenn Lokronan, e vo displeget
C'HOARI AR BARZAZ BREIZ
gant 200 c'hoarier, Strolladoù kanerien vras ha bugale.

OUSPENN-ZE : Eus an 1 betek ar 15 a viz Eost :

Diskouezadeg an ARZOU SAKR BREIZAT, e SAL ar MIRD

Ra blij gant an holl veleien a zo e penn ar parrezioù kas da Lokronan evit an diskouezadeg-ze an holl deñzorioù o
deus an enor da ziuall en o ilizoù : panieloù, kroazioù, kalurioù, skeudennoù hag all...

(Gwelit en niverenn-mañ, galv an Ao. Breton, karget da zevel an diskouezadeg-se).

An Dimezell Gaid Koadou, eus Kelc'h Keltiek Lokronan, he deus bet ar vadelez da gemer en he c'harg chom e gourc'hemennou an
holl evit kement tra ha zell ouz Bleun-Brug ar bloaz-mañ.

BREIZIZ !

Ar Bleun-Brug a vo eur **GOUEL KELTIEK** dispar, **EN EUR GÊRIG** eus ar Grenn-Amzer ha
n'he deus ket he far e Breiz, e kreiz meurded gouez **MENEZ SANT RONAN**, dirak ar
MENEZ HOM ha **BAE DOUARNENEZ**, a c'hell an den mervel laouen p'en deus he gwelet !



teñzor an dintin goz

Kendalc'h

Fañchig Kideller, penisher Kervruged, a zo, a gav dezañ, war an hent da gacut an teñzor kuzet gant e dintin goz, er c'holomdi, hervez ar gerlou mac'ha-gnct he deus getlet distripa araok mervel. Klasket en deus er mogerlou er maez : n'en deus c'hoaz kavet neñra.

An eur bignat, gant e letern war enaou, ar skeul breñvedet a gase d'ar zolier toull-didoull, setu ma savas eun tammig arvar, eun elfenn a zifiziañs war galon Fañchig. N'helle ket ar pennher yaouank lakaat mat en e zoniñ e vije deuet a benn eur vaouez hanter-zall, koz ha kabac'h, pignat ha diskenn en eur skeul a seurt-se, p'en doa e unan mil boan o sevel enni. Se a oa, diarvar eo, dreist galloud e voereb Annaig, p'edo o ren he dek vloaz ha tri-ugent.

Eur pennad brao a amzer a oa abaoe m'oa aet ar c'houeriad d'ar c'hialatrez, ha kaer en doa klask hag adklask, maen-korn ebet na gave. Neuze, aet skuiz o furchal hogn war gogn, hag o tamzellet ouz an eil moger d'eben, e teuas ar paotr d'an traoñ.

Mouga a eure goulaoenn-lutig e letern koaget, hag azcza war eur maen-forn, eur vreo goz, en eur staga-da brederenni... hep gouzout edo azezet war an dra a glaske, kuziadenn aour e dintin goz, hag a oa o loured dindan ar pikol maen toull-ze! A! m'en dije divinet ar c'hañfard al lizerenn-genta eus ar ger diweza a lavaras ar paourkaez Annaig abarz kuitaat ar bed-mañ!

« Eus an diweuz d'an hanaf ez eus pell », eme al lavar koz, kredi a-ran e vez alies ar wirionez gantañ.

Siouaz! Seulvui e strive ar c'houeriad da glask, seulvui e rouestle ar menoziou en e benn, seul dougna a rae beg lemm e spered, ha seul vrasoc'h e kave an harz a vire outañ da gaout penn alaouret ar hellenn-neud seiz a gase war eun d'ar pezh en doa c'hoant tizout.

Ha setu, a greiz ma oa lakaet ar c'hasker an nec'heta, eur vaouez koz o vont ebou gant he bec'h keuneud.

Hag hi da lavarët en eur dremen :

— Ata Fañchig, brao eo dit aze! Lavaret e vije graet, ouz da welet azezet war da vaen-forn, eur roue war e gador! Lod eus an dud o deus chañs er memes tra!

— Lavaret mat a c'hellit, Tinaig, a youc'has ar c'hañfard en eur zével trumm en e zav.

Ar ger « maen-forn », oc'h enaoui poulc'henn spered ar c'hasker, a lakeas eur barr levenez en e galon : kavet en doa penn an neudenn, penn alaouret an neudenn greñv ha lugernus a oa ret dezañ kaout d'e heñcha betek an teñzor, ha ne c'hortoze ken tra nemet kuitaat e doull teñval.

— En taol-mañ, emañ din, eme dezañ e-unan ar c'houeriad yaouank, en eur zistanka an-toull a dreante ar maen-forn.

Tennet gantañ an tamm douar diweza a oa da grabanata ebarz an toull, e santas dorn ar c'hasker eur vilienn, eur voul-vein, hag a oa re vras evit beza bet lakaet eno dre ar ganouc'hell m'edo, brec'h ar paotr enni. Rak-se'ta, dic'halloud oa ivez d'he zenna kuit ac'hanñ hep lakaat ar granenn war he c'hann, pe ober eun toul dindani.

Lakaat ha tenna a eure nouspet gwech ar c'houeriad e zivrec'h e toull ar vreo... A forz da firbouchat strad ar c'hleuz anezi, setu ma ruilhas ar niaen flour a gleiz. Neuze e santas Fañchig eun dra bennak o toulla dezañ pennou e vizied, hag, o vouga eur glemmadenn, e tennas eur bodig kelen hag eur bod beuz d'al laez.

(Da genderc'hel.)

AB SULIO.

PIRC'HIRINADENN JOZON

KEMENER e oa Jozon, eur mestr war e vicher, met, hervez ar brud, akuitoc'h chen bourdou pilhaouerien ar Roc'h, hag a oar koulskoude larda druz! c'hoaz da ficher marvailhou. Dont a rae gantañ tezennoù, dister en o c'hi-Yann-varmouz a blij dezañ sevel e fri amañ hag abont : me a oa evel ar reou all. Mont a raen alies d'ar c'hoall da welet skei war an tomm; da di ar c'halez da zikour tacha archedou; da di ar gwiader d'e zelaou o kana pe o c'houitellat gwerzioù Breiz-Izel; awechou ivez da di Jozon.

Gwechall, eme hemañ, ne oa ket er bed eur vicher startoc'h eget hini ar gemenerien. Dalec'hmat war ar stern bragezeier vouloze-teo, tavañcherou toskanek, rochedou lien kalet ha reut, Nag a veskenn am eus torret! Marteze ne gredi ket, mah paour! Eun deiz e Kerwegan, e teuas va nadoz, ma ramkis diskregi diouti, rōstet va biz-meud ha va biz-yod.

Paourkêz Jozon!

N'eo ket heñ avat a gontas din ar pezh a c'hoavezas gantañ e Landreger. Biskoaz ne rannas grik da zen war an taol fentus-se hag a redas ar c'helou anezañ, a c'henou da c'henou, betek Montroulez ha pelloc'h marteze.

Monig Toulouzan eo a zibunas din ar gudenn, en eur drei he c'harr-neza, gorrek ha braok.

Eur zadorn, emezi, e oa se. Gouzout a ran e oan aet da birc'hirina da Zant Erwan, gant Jozon hag e c'hoar Perrin.

Lakaet hor boa en hor penn mont d'ar Vinihy dre an hent-houarn, gant an treñ div-eur.

Jozon avat a felle dezañ mont war e droad : « D'an oad m'emaoun, emezañ, biskoaz n'oun bet e-seurt kirri, ha n'eo ket hirio emañ-me o vont; n'am eus ket a c'hoant da veza friket! »

Da eun eur hanter eta, setu Perrin ha me war du an ti-gar, ha Jozon en heñchou : « Me a vo erruet en-ho-raok, emezañ! »

Leun e oa an ti-gar a dud. D'ar poent, va feiz, e tifoup ar marc'h-du, maged leiz e fronellou. Dre forz reuz ha bontadeg, e teuomp a benn da bignat er vagon. Eun taol sut, ha yao war draoñ etrezek ar Roc'h, ker-benn ar stoup hag ar stoupaerien. Hejet ha dihejet, stardet ha moustret evel kaplaned en eur voest! Bec'h am boa o kaout va anal, ha ne welen netra.

E keit-se, Jozon a biltrote dre an heñchou don, buhan, buhan, en eur rodal, e dreid gantañ war ziavaez, evel an darn vuia eus ar gemenerien. Er brouskoadou, an evned a gane en eur zarnijal a skourr da skourr. Edo miz mae en e gaera, digoumoul ha sklaer an oabl, glazur leiz ar parkou hag ar prajou; ar gwez avalou en o bleuñv, ar c'hleuzioù goloet a vokedou-laez, bokedou ar Werc'hez, paobran, violetez hag hall; c'houez vat, kaerder ha levenez a bep tu.

Setu Jozon dirak treizlec'h Pontraod, ar « pasach » evel ma lavar an douristiked. Ar ster, — ar « Yeodi » a vez graet anezi —, a oa en he uhela gant al lano. D'ez, edo Per an tremener o loc'ha, leun e vag a dud.

« Go... go... gortoz eun tammig, Per », eme Jozon, a oa saoz eun nebeudig. Per, avat a oa bestead a grenn :

« Gou... gou... goude », emezañ; hag araok m'en doa echu e c'her, edo ar vag e kreiz ar ster. Amzer da garga ha da dana e gorn butun, ha setu Jozon er vag d'e dro.

« Ha... ha... hast buhan, Per! »

— Ra... ra... ra ket goap ouzin, Jo... Jozon. »

P'edo Jozon o krapa gant an dosenn da baka hent bras Landreger, e klevas an treñ a tremen war bont ar Roc'h. Kemer a reas eur votez e pep dorn, ha bec'h d'e ziwesker.

Setu ar marc'h-du e Langazou, ha ni ivez, Perrin ha me, a drugare Doue; brevet hon izili avat ha rodellet hon tammou dilhad.

— Me zo amañ pell 'zo, em Jozon, p'en em gavomp gantañ.

— Fougere, eme Perrin, ro peoc'h!

— Eur brizenn-vutun, Monig?

— Ya! Bremañ, tud vat, kemeromp hor chapeled, ha ger bet ken! Jozon a reas eveldomp. Ober a reas ive teir gwech an dro da iliz Sant Erwan, diarc'henn ha diskabell. Evel pep Tregeriad, evel pep Breizad mat, Jozon a oa troet meurbet gant Sant Erwan.

Eur wech echu hor pedennou, Perrin a ginnigas mont betek Landreger da c'horloz an noz, ha da zebri pep a damm. Goude, e tistrofemp d'ar Vinihy evit an oferennoù-noz. Deomp d'an iliz-veur, eme Berrin; ha ni, kerkent, ebarz. Eun dudi, an iliz-se, neketa!

Ha setu ma lakas Jozon en e benn pignat er viñs a gas betek kreiz an tour. Digor e oa an nor.

« Evel a gari, eme Berrin; ni az kortozo en « ostaleri ar marc'h gwenn. » Pa oan bihan, me 'zo bet ivez war dour Landreger. Ac'hano e weler ar vro n'ouzon ket pet leo tro-dro : mor hag inizi, touriou-tan, steric ar Gindi, koad ar Bilo, ar Yeodi, kastell Penn-ar-c'hoad, ilizou ha touriou uhel, parkou ha lanneier adalek an aod betek Mene-Bre; nep 'zo mat e lagad a wel zoken kribenn Menéz Are.

Met paourkaez, setu Yann pell diouz e gaze!

Setu ni eta, Perrin ha me, da « ostaleri ar marc'h gwenn ». Pep a vanne kafe-laez, ha goude, pep a hini all, pegwir ne deue ket Jozon en dro.

Ret mat deomp mont da welet e pelec'h an diaoul e oa sac'het. Ober tro kêr, diskenn d'ar Pont-Du, da Goad an Eskobti, d'ar Pont-Kanada : Jozon ebet!

Tostaat a rae an abardaez-noz. Adarre dirak an iliz-veur, e savis va daou-lagad evit gwelet pet eur e oa.

Petra 'welis, va Doue benniget? Jozon ouz garridou an tour, o sevel hag oc'h heja e zivrec'h evel eur villin-avel.

Perrin a hopas warnañ : « Deus 'ta, sot brast », en eur ober sin dezañ da ziskenn.

Ha Jozon a rae sin deomp da vont d'e gerc'hat.

Ni d'an iliz. Siouaz, alc'hovezet oa dor ar viñs a zav er c'hloc'hdi. Jozon, deuet d'an traoñ, a youc'he : « Kit da glask an alc'hovez da di ar zakrist pe an Aotrou Person! »

Hogen, na sakrist na person e nep lec'h!

Paourkaez Jozon! M'hor bije gallet da vihana sila dezañ eun tamm bara hag eur banne sistr da dremen e nozvez! Nec'het oamp, ha koulskoude, en despet deomp e tirollemp da c'hoarzin.

« Petra 'ri, eme Berrin! Bremaik ni a vezo serret warnomp amañ ivez. Ba! Warc'hoaz-beure e teui er maez! Noz vat dit! »

Ha ni da « ostaleri ar marc'h gwenn ». Biskouaz n'am eus bet tañvaet-kig leue ken tener, piz bihanker c'houek, patatez nevez ker mat : eur pred eured, me lavar dit, evit eur skoed etrezomp hon diou.

Epad an oferennoù-noz e iliz ar Vinihy, ne zizoñjomp ket Jozon en hor pedennou, ha lakaet hor boa pep a bevar real evitañ e kef Sant Erwan.

Edo an deiz o tarza pa gemerjomp hent ar gêr, ha pa dintas an Anjelus edomp er Roc'h : dor ebet n'oa digor e kêr. E Peurit ivez, kristen ebet war ar bale pa errujomp. Perrin a lakeas dour war an tan hag edo ar c'hafe o tont war an daol pa lammaz Jozon en ti. Ne oa na laouen na teñval e benn. Louka a reas eur bilbenn vat a vara, silzig, kig-sall, diou skudellad sistr, ha d'e wele, hep lavaret bu na ha.

Skañvaet hor spered, ni a reas, Perrin ha me, eur c'hovad kafe, ha daou govad c'hoarzin.

Sed, paotrig, ha pa jomfen tri-ugent vloaz all war an tamm douar pri-mañ, biken n'ankounac'hain pegen trist ha pegen fentus e vouboue mouez Jozon etre mogerioù ramsel iliz-veur Landreger.

Ha Monig da gana :

Jozon, ni glev da glemmou
Eus an tu all d'an nor;
D'az mouez ha d'az ezommou,
Hor c'halon 'zo digor...

Ar C'harr-neza a baouezas da drei hag ar vquezig flour a ehanas da gana. Ne oa ken a c'hloan war gegel Monig.

EVNIG-PENN-AR-C'HOAD.

GWECHALL E KERWENN

E pad an hanv

KAER e vez an amzer bemdez. Evel m'eo bet ar goañv eun amzer galet, glao, yenienn, skorn, setu ar mizioù hanv a vezo leun e heol, a dommder.

Nebeut a nec'hamant eta gant an dilhad pe ar bouteier : zoken ar re doull a c'hell talvezout. Ar vugale avat a vez peurliesha diarc'henn.

Ar skol a zo echu abaoe an tomm-der bras. En tiegez n'eus den ebet a re : pep hini a gav krog hervez e oad hag e nerz, koz ha yaouank. Setu unan eus an traoù kaer war ar maez ha ne gaver e micher all ebet!

Ar vugale a zo en o flijadur pa vez lakaet eur pezh labour en o c'harg gant o mamm pe o zad koz. Da ziwall ar zaout ez eont alies war an deiz. Ous-penn-ze, diouz ar pardaez, Soaz peurliesha a yelo ganto da relachi ar zaout-laez, a vez lart-toaz : unan araok, gant ar gordenn; pemp pe c'houec'h war-lerc'h oc'h ober tro ar parkeier-ed. Bec'h a vez viret ouz an taolioù teod war an eost; meur a veoc'h, skañv o gar, a vez pennasket pe hualet. Edoug diou eur, e vezo graet tro ar park, en eur lavaret ar japeled, ha marvailhou goudeze... Pegwir emañ o mamm ganto, ar vugale n'o deus avi ebet ouz ar gamaladed a zalc'h ar zaout e « park an ero hir », da lavaret eo war an heñchou.

Petra zo a nevez gant ar c'hleier? Eur vadeziat eo; eus ar Vereuri. Setu an trede boleaden : eur paotr eo eta, rak evit ar paotrezed, ne vez nemet diou voleaden. Adarre e c'hell « Salomon » lavaret d'an Aotrou Person : « Kenavo ar bloaz a zeu », evel ma lavar e termen badezi pep hini eus e vugale.

Bep ar mare ez eer da welet ar gerent amañ hag ahont. Ma'z eus eun devez labour evit Per pe evit ar marc'h gwenn, Soaz a ya abred diouz ar mintin gant ar strollad bugalioù, war o zroad. Betek diou ha teir leo vale a vezo graet hep re a skuizder, adreuz ar parkeier awechou evit troc'ha berr, ha gant eun ehan pe zaou mar bez ret. En tu all da Geridion, ez eer bep taol e ti ar gwiader, evit gwelet unan eus ar re ziweza a gendalc'h da labourat war ar vicher. Eur pennadik e chomor da zellet ouz ar

stern, an neud, ar pouezioù hag al lien steuet a nebeudou.

Hag ec'h en em gav Soaz hag ar ribitalh e ti he breur... Eur wech all e ti he c'heniterv, evel he c'hoar, savet m'int bet asamblez pa oa Per ha Fañch o terc'hel o daou an tiegez-mañ. Eun deveziad c'hoari evit ar vugale; eun diskuiz hag eur gouel evit ar re vras : plijadur yac'hus evit an holl.

Per a zo aet gant e baotred vihan da vaner Keryann evit gouel ar *Bleun-Brug*. An engleo, nevez savet gant an aotrou Perrot, kure Sant-Nouga, a ra vodadeg kenta. Brud en deus raktal : laketao bet en e zav evit skora ar brezoneg hag ar feiz; tud niverus a zo deuet, a dost hag a bell, evit e skoazella.

Etre Bretoned a galon emañ : pen-nou bras ar vro, hor c'hannaded, de Mun e penn, ar c'haner Botrel gant e wreg, Person an Dre gant e zone-rien... Dilhad Leon, Treger ha Kerne kemmesket... Kanaouennoù eus ar re gaer, prezegennoù ivez, eur pezh c'hoari forsus, « Biel al liardou »; eun dennadeg d'ar zort war eur maout... Per a roas eur gwenne bennak evit ar vugale : allaz! ar maout ne voe ket dezo!

Ha setu poent ar foenn. E Kervenn ez eus krog da zeitek falc'her, ar « Merdi bras » o vleina. Pemzek gwen-neg an devez falc'her!

En toall-mañ, ar vugale a zo en o bleud. Soñjit 'ta! Galoupat diarc'henn etouez ar foenn, debri er foenneg, ober ar c'houk er prad dindan diou pe deir forc'had foenn, harpet an eil ouz eben evit disheolia... Met perak ober eur c'houk? Evit beza morzedet goudeze! Epad ma ra al labourerien eur voredenn, ar vugale a red da bell, da glask siliou er ganol. Peurliesha ne gavint nemet raned pe gesklerien!

Betek ma vo echu ar mellad bern foenn e traoñ al leur, pep hini a boan-io da ficha foenn, da rodellat, da drei, da galzennat, da zispaka, da rastella, da ziboulla, da vresa...

Hag er prad, aet ar foenn kuit, e vo eul lec'h eus an dibab evit diwall ar zaout. Meur a hini, a c'haoliad war gein eur veoc'h, a zesko eno beza eur marc'heg dispoñt. Ne gredan ket e vefe gwelloc'h skol!

H. GREFF.

KELEIER...

Ganedigez

Loeiz (ar paeron), Donasian, Anna, Eoded (ar vaeronez) ha Tangi LAURENT a zo ganet dezo eur c'hoarig, he anioù

MARI GWENAEL LOEIZA

Naoned, 23, a viz mae 1949.
Paris, 44 St. a Fleurus, 6vet.

Hor gwella gourc'hemennou!

AR BREZONEG E TI HON TAD SANTEL AR PAB PI XII

Kals eus hol lemmerien a oar ez eus bet, da viz ebrel diweza, eur pirc'hirinaj bras e Rom evit an holl studieren eus ar Frañs a ra perz eus strolladoù « Kanerien bihan ar groaz-koad ». Eur berniad a oa anezo, pegwir d'ar zul vintin, 24 a viz ebrel, e oa 4.000 kaner bodet e iliz-veur ar Vatikan, evit an oferen-bred kanet gant Hon Tad santel ar Pab.

Met ar pezh ne oar ket, kals a dud eo e voe digemeret da geñver an devez-se gant ar Pab, ar Vretoned yaouank a oa er pirc'hirinaj: bez'e oant studieren eus skolladoù Sant Loeiz ha Sant Jozef an Oriant, eus Likes. Kemper ha Kloeirdi bihan Pont-e-Kroaz... Souezusoc'h c'hoaz, ne voe nemet ar rummad-se da veza bet digemeret epad ar zizun abez evelse. Enor d'ar Vretoned yaouank, hag ivez levezeg bras evito da veza galvet da gomz gant Tad an holl gristenien.

Epad ouspenn eun hanter- eur, e c'hoas ar Pab da varvailhat ganto, o vont eus an eil d'egile.

D'an 29 a viz ebrel eo bet ganet, e Kensi-Koad-Senart (S.-et-O.), Malo, eil mab Alan al Louarn ha Noela Olier. Kroaz Breiz a zo laouen o kinnig he gwella gourc'hemennou d'ar gerent a stourm ken kalonek evit ar brezoneg, hag an he-tou ar c'houeka a yuhez hir hag eurus d'ar Breizad yaouank.

Goude beza roet dezo bennoz ar c'himiad, Pi XII a c'houlennas outo kana de-zañ eur ganaouenn vrezonek bennak...

Gant kleñved an divrezoneg kouezet war hor bro, e voe, evit doare diaes seveni da c'houlenn Hon Tad santel!

Dre furchal koulskoude ha skrabat ar penn, e teujot a benn da gaout eur pemzek bugel bennak eus al Likes, hag a c'hellas distripa eun « adoromp holl » benak... Ker buhan all e vefent chomet bout!

Poanias awalc'h eo bet er memes tra, hag ar gentel a zo bet kalet, dreist-holl o tont eus a geñ uhel!

Meur a hini o deus touet enno o unan en devez-se, met eun tammig diwezat, ne vefent mui tapet evelse! Gwella a-ze!

Pinvidik awalc'h eo roll ar c'hantikou hag ar c'hanaouennou brezonek evit gel-lout rei luf d'ar strolladoù kanerien a volonte vat! Ma ne gredit ket, deuit da zelaou ar c'hanaouennou e Bleun-Brug Lokornan, d'ar 7 a viz eost!

Y.-F. ar F.

*Robic, hag en deus
prometet rei e velo
da Santez Anna
Wened mar gell beza trec'h,
ar wech-man
evel daou vloaz 'zo.*

*Gant piou e yelo ar maout,
en "Tour de France" ?...
An holl Vretoned, eveljust,
a garfe ma vije eur Breizad.*



C'HOARIOU

RESPONT DA C'HOULENNOU MIZ MAE

Divinadennoù.

1. — Eur penn-oc'h hep doc'hal, eur c'hi hep pildrotal, eur vaouez hep kaozeal.
2. — Ar c'hag pe ar c'hleuz.
3. — Peder bronn eur peoc'h.

Gerioù-kroaz, N° 14, gant Kerlann.

1	G	O	R	A	D	E	N	N
2	W	A		I	O	D		I
3	E	N	E	O	U		U	J
4	N			U	R	Z	I	A
5	G		L		I	O		D
6	O	T	O	U			R	E
7	L	O	A		T	R	O	N
8	O	G	R	O	U		E	N

KLASKIT EN DRO-MAN

Divinadennoù, evit eun devez foar:

1. Petra a zo a stanka war blasenn ar zaout da zeiz foar Landerne? —
2. Hep lakaat eun troad araok egile, e ya d'ar foar war bevar droad, alao koulskoude a dreuz d'an hent, ker bihan hag ar marc'h evelkent. Petra eo? —
3. Hemañ, hep keuz na glac'har, he kuzet mat, a ya d'ar foar, an dour en e zaoulagad. Petra eo?

Gerioù-kroaz al Lagad-du, N° 15.

A-b'laen:

1. — Amzer a reuz hag a freuz.
2. — Lister (pluriel) oan.
3. — Ano maouez. — Gourc'hemenn d'eun den azezet.
4. — Mil dibennet. — En aoledou da Nedeleg.
5. — Klask neiziu.
6. — Eur wezenn, enni danvez bouteier.
7. — An hanter eus unan. — Touadenn. — Rannig-heti.

A-zerz:

1. — Teil ar mor (liester).
2. — Gwazig-dour graet gant an den.
3. — Lodenn wella an den. — Er pin.
4. — Ho prec'h pe ho kar.
5. — Ebarz. — Eus ar verb « tana » (am-dremenet).
6. — Ano kastell-krefiv Jeruzalem.
7. — Eul lodenn eus ar c'horf.
8. — Redek bro a-hed lezioù.

8									
7									
6									
5									
4									
3									
2									
1									

En hanv deuit da

OSTALERI "AR GWAGENNOU"

HOSTELLERIE LES FLOTS
AOD AR RIS-PLOARE
E KICHEN-DOUARNENEZ

DIGEMER MAT EN TI
TRAOU EUS AR GWELLA
DA ZEBRI HA DA EVA
TI-LOJA IVE

Skriva d'an Itron:

LE PENNEC Yves

PLOGONNEC (FINISTÈRE)

Tél. { N° 1-90 Douarnenez
(Juillet, Aout, Sept.)
N° 5 Plogonnec permanent

QUIMPER

**FAIENCERIE
HENRIOT**

QUIMPER



TOUTES CARROSSERIES
INDUSTRIELLES & COMMERCIALES
"Métallique et Alliage Léger"

TUAL

TREDION
MORBIHAN

TÉLÉPHONE : 6

"A SAINT JOSEPH"

325, Rue Léon-Gambetta. — LILLE (Nord)

J. GORRISSEN, Tailleur diplômé

Toutes spécialités pour M^{lle} les Ecclésiastiques

SOUTANES, PÉLERINES, MANTEAUX ROMAINS, etc...

BAS pure laine très solides : 350 francs

TRAVAIL SOIGNÉ — PRIX MODÉRÉS

ÉTABLISSEMENTS

Pierre CHANCERELLE

Conserves Alimentaires

(4 USINES EN BRETAGNE)

SIÈGE SOCIAL : QUIMPER

MOUSSEUX SUPÉRIEUR "V^{ve} AUBIN"

Gwin - Spoumek Dreist
E gwerz e ti an holl Varc'hadourien - Gwin
dre ar Vro a-bez

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h mab

Straed Kereon, KEMPER

Téléph. 7-03

Levriou - skol

Pep tra evit ar skolidi
hag ar bureviou

Levriou - oferenn

Levriou - kan

Levraoueg

Poupées. Broderies

Le MINOR

Pont-Sabbé

Bretagne

Lans da Vicheriou ar Vro

Mark ar Berr "à la Ville d'Ys" (Ker-Is)

16, Boulevard Kerguelen (e-kichen ar Post). — KEMPER

Pour Tout
ce qui
concerne
la PHOTO

POUILLOT-EHANNO

PONT-L'ABBÉ — Téléph. 1-21

ON SE DÉPLACE SUR DEMANDE

POMMES de TERRE - GRAINS - ENGRAIS - FOURRAGES

Alain PÉRON

57, Rue Ernest-Renan, PONT-L'ABBÉ (Finistère) — Téléphone 24



LIBRAIRIE LE DAULT

16 bis, Rue René-Madec — QUIMPER

LIVRES - GRAVURES - ANCIENS & MODERNES
Tout sur la Bretagne

Achat de Livres (et de vieilles reliures)
se rend sur place à ses frais

Chapellerie JEAN LE DRÉZEN

RUE JEAN-JACQUES ROUSSEAU, PONT-L'ABBÉ

GANTS • CRAVATES • BAS • NOUVEAUTÉS

TECHNIC - RADIO

ETABLISSEMENTS MICHEL CARIOU

15, Rue J.-J. Rousseau — PONT-L'ABBÉ

Toute la Radio

Téléphone 114

Imprimerie Centrale de Bretagne

EDITIONS
REVUES
PÉRIODIQUES

PROGRAMMES
TOUS TRAVAUX
COMMERCIAUX

36, Rue Richard-Lenoir, 36

RENNES

KIRRI-TAN AR C'HREIZKÊR LAGADEC - RIOU

SERVIJ AKETUS ETRE ROSGO HA BREST
BEAJOU - EUREJOU

KASTELL-PAOL

POUR vos REMORQUES pour TRACTEURS et ESSIEUX AGRAIRES

en tous Genres Fabriqués en nos Ateliers

Adressez-vous à la Maison

LE DOLY & FILS

44, Rue du Pont-Neuf - SAINT-POL-DE-LÉON - Tel. 55

PNEUS NEUFS ET RÉPARATIONS

Augustin LAURENT

KASTELL-PAOL

A c'hell kas da bep lec'h :

Holl frouezou an douar - Frouez prim - Kaol bleunv

Artichaad - Ognon - Avalou-douar

(da hada kouls ha-da zebri)

Kolo - Ludu

Tel. 134

POMMES de TERRE en GROS

Spécialités pour semences

CHOUX-FLEURS, ARTICHAUTS & FRUITS

Téléphone 2-33 (jour et nuit)

Boîte Postale : 61

H. CAMBERLEIN & Cie

S. A. R. L. au capital de 200.000 francs

EXPÉDITEURS

SAINT-POL-DE-LÉON (Finistère)

Annexe : FAIMPOL - Téléphone 2-10

FORGE - CHARRONNAGE

MACHINES AGRICOLES

Jean-Marie RIOU

49-52, Rue du Pont-Neuf

SAINT-POL-DE-LÉON (Finistère)

CARROSSERIE EN TOUS GENRES

KOADACHOU EVIT AN TIEZ

ARREBEURIOU-WAR C'HOULENN - ARREBEURIOU-SKOL

S. CELTON

23 ha 25, Straed Rozlère - KASTELL-PAOL

Tel. 250

EMPLACEMENT RÉSERVÉ
AUX ÉTABLISSEMENTS

HALPER & C^{ie}

BORDEAUX

BEAUNE

(VINS FINS)

Graines
Fleurs Naturelles
Faïences
Couronnes

U^{lle} Hily
2, rue d'Arvor et 3, rue Pasteur
LANDIVISIAU Téléph. 62

LA COOPÉRATIVE FORESTIÈRE

BOIS DE CHAUFFAGE
GAZO-BOIS
ACHATS — VENTES

8, Place Saint-Michel, SAINT-BRIEUC
Siège Central : 34, Place des Lices, RENNES
Téléphone 55-75

Dans un cadre agréable...

Une table de choix...

Une cave renommée...

Restaurant GIRAudeau

(BAR PARISIEN)

13, Rue Jean-Jaurès, QUIMPER
Brezonég en ti